

XIV

Evelse goulennomp fizianz
 Feiz karantez hag esperanz
 Hag e resefomp heb dale
 Ar grasou-ze digant Doue.

XV

E poan ar c'horf ive pedomp
 Diboaniet asur e vefomp,
 Mez deskomp dreist holl er vue
 Plega da volentez Doue.

XVI

Ma zaimp evel Jenovefa
 Goude buez hir er bed-ma
 Da balez kaer ar baradoz
 Da veuli Doue deiz ha noz.

KANTIK

EN HENOR

SANTEZ JENOVEFA

PATRONEZ LOQUEFFRET

DISKAN

Andante



Da ze - vez gouel hor Pa - tro - nez, Kris-te-nien,



ka - nomp as-sam-blez, Gou-len-nomp hi-rio dreist peb




tra Ben- noz San - tez Je - no - ve - fa. Gou-len-nomp



hi-rio dreist peb tra Ben-noz San-tez Je - no - ve - fa.

I

Tost da gær Paris e c'hanaz
 Kerent kristen he luskellaz
 Hag a roaz d'hezi leac'h danvez
 Evit Doue guir garantez.



Imprimerie :

Kempenn, 20, a viz kerzu 1912

A. COGNEAU, vic. gén.

CHAUSSEAU, IMP. A. CORCUFF

II

En eur ziuall var ar mœziou
 He bandennad denvedigou,
 Ar plac'hik bemde a greske
 Muioc'h mui e doujans Doue,

III

An Eskop brudet Sant Jermen
 Dre gær Baris en eur dremen
 A jomaz a grenn souezet
 O velet eur plac'h ken parfet.

IV

Va merc'h, emezan, n'ho pefe
 C'hoant en em woestla da Zoue ?
 « N'em beuz ken ioul nemet hennez »
 A respountaz prim ar zantez.

V

Azalck an devez euruz
 Ma oa n'em roet da Jezuz
 E tremenaz he holl buez
 En oberiou a garantez.

VI

Ren eur vuez euz ar rusta
 A oa mênnoz Jenovefa :
 Iun, ha vijil ha pinijenn
 Setu he buez pénn-da-benn.

VII

Dre ma kreske e santelez
 He galloud a greske ivez
 An neb en doa fizianz ennhi
 A gave sikour diganthei.

VIII

Da vare eur gernez spountuz
 E oe gaelet ar plac'h euruz
 O kestal bagadou guiniz
 Evit sikour he c'henvroiz.

IX

Goude kernez, oe brezel kriz :
 Diwoal a reaz kær Baris
 Diouz eur brezeller didrue
 Leshanvet mad : goalenn Doue.

X

Poaniou ar c'horf hag ar spered
 A gave diganthei remed
 Meur a vech ar maro zoken
 A blegaz dirak he feden.

XI

Mervel a reaz oajet braz
 Var he bez an holl a ouelaz
 Mez euz an env Jenovefa
 Ho zikoure guelloc'h guella.

XII

Abaoue e meur a barrez
 Jenovefa zo patronez
 Hag en em blij o konsoli
 An neb en deuz fizianz ennhi.

XIII

N'hini zo bec'hiet he galon
 A dle dreizhi gouleñ pardon,
 Evel guechall e resevo
 Peoc'h ar galon, ar guella-zo.